



# GUERZ NEVEZ.

*Var un ton nevez.*

**M**'am be aotiale'h a studi, a speret da rima,  
Hac ur bluen em dorn, ha me prest da scrifa,  
Me gompose ur reglen ervez va santimant,  
Var sujet un atretien entre daourzen yaouanc.

Mes qentavanç davantach me c'houlen asistanç,  
Eus ar sperejou caëra qent evit e c'hommanç,  
Da rei lumier d'am speret pa meus occasion  
Da ober ur son nevez ervez va intantion.

Pa lennan ul leor bian zo en esyer vastudy,  
Me a gav traou surprénabl hac a ra chagrin din,  
Pa lennan va flaneden scrifet gant va mestres,  
Eus va brassa plijadur me meus trisdiguez.

Pa voan ebars em jardin em oll gontantamant,  
Me remercas ur fleuren a voa yiè ha brillant,  
Qen brillant e voa e deillon hac an eol ardant,  
Pa deu dezàn para ebars ar firmamant.

Quinez zo ur fleuren eus a velaveoni,  
Antreet donn em c'halon ha diez da effaçi;  
Prinç an oll amouroustet, roue an dud yaouanc,

E c'hundu dre e sellou d'am renta languissant.

Qenta m'am boe an enor da velet va mestres,  
E voa er porchet goude an oferen bred ;  
An eil guech ma e guelis assuri a ellàn  
E voa ebars en ilis bet e communia.

O ober e fasz qenta e mesq ar vugale ,  
D'ar-poent-ze e voa yaonanc ha me a voa ive ;  
Aben ur pennal goude e his d'arscol da Vengamp  
Hac hi er memes amzer a voa bars ur gouant.

Ma teuis da zilezel va education ,  
Evit dont d'e antreteni eus a greis va c'halon ,  
Evit dont da antreteni Rouanes ar fleurieu ,  
Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

Ounnes a zo ur fleuren eus a velanconi ,  
Caeroc'h evit fourdelis nac ive romani ,  
Am eus dezi goenvi assuri a ellàn ,  
E lacai va c'halon var ar poent da rannàn.

An eil de a vis eost me lacas em speret  
Hac ive em fantasi mont da velet merc'het ,  
Mont da velet va mestres, Rouanes va c'halon ,  
Va oll desir er bed-mâ, va inclination.

Debonjour d'ec'h, va mestrez, an devez a hirie,  
Gant ur galon gontant evel zo ganeme ,  
Couscoude pa en em sonjàn e voa din lavaret ,  
Ne ràn nemet coll amzer o tonet d'ho cuelet.

Sot oc'h sur, va servicher, ma teuit da gredi  
Ar goal deodou milliguet zo o clasq hor separi.



Ha pa vec'h din dispennet qermunul hac ar pell,  
Se ne rafe qet din-me douet d'ho tilesel.

Pell so deus a amzer me am boa desiret  
E teu jac'h d'am saludi evel va muia caret,  
Ne larec'h guer ebet, ne rec'h qet a seblant,  
Me'm boa displijadur, mar edoe plac'h yaouanc.

Traitoures milliguët! chenchit ho preposiou,  
Rac defianç a rit din pa lavarit ho comzou,  
Rac defianç a rit dint pa glevàn ho comzou  
Ebars cayer va studi demeus ho preposiou.

Eleal, va servicher, va e'hredi a ellet,  
Rac me sinfe gant va goad ar pez ameus laret.  
Dele'bet d'am darempredi a bet fidel din-me,  
Biqen na vemp separet an eil ous eguile.

Qen a deuio Doue d'hor guervel evit ar vech  
diveza,

Da vonet da renta cont da Grouer ar bed-mâ.

Qen a deuio ar maro da finissa hor bue,  
Biqen na vemp separet an eil dious eguile.

Me meus guelet va-unan differanç dionzin,  
Mari, Mari, va mestres, eus ho tarempredi,  
Ha tud a zo puissant, o deus renq ha leve,  
Me na meus qet a vadou, gout aoualc'h a rit se.

Ouspen da guementse zo emei, va servicher,  
Ar madon hac an arc'hant a eller da ober;  
Un den a vez demezet enep e santimant,  
N'ell qet terri e gontrat evit aour nac arc'hant.

Qement so var an douar gant va Doue cronet,  
 An oll aour, an oll arc'hant en ur pres destumet,  
 Hac e vent roet dime, ne ven get c'hoas contant,  
 Ma n'em be get ar boneur da bosse di va c'hoant.

Me a meus grêt ur boqet demeus a zivision  
 Evit rei d'am mestrezic passetans d'e c'halon,  
 Hac a meus grêt anezàn dimeus a huanad  
 A lacaio d'en erren ur ruban eus va goad.

O tistrei eus ar pardon, ha var lein ar mene,  
 Un devez dreist ar re al hi a'laras dinme:  
 Ma na guerit chanch a gontre pellât diouzin,  
 Ar goal deodou milliguet a glasq hor separi.

Ounnes eo ar bromesse o poa-hu dime gret  
 Diveza m'am boe an enor va mestres d'o cuelet!  
 C'houi a brometas dime hac ive dre ho le  
 Na vijemp get separet evit deus ho coste.

Var ben un nebeut goude int bet dispartiet,  
 An effet eus ho comzou a so bet eprouvet;  
 N'eus netra var an douar m'el assuri ervat  
 A sco un tol qen mortel evel ur goal deodat.

Pa voan ebars em guele nos gouel ar Rouane,  
 Me glêve un eün em jardin hac a gane yiê;  
 Lavaret a rê facil an eünic dre e son:  
 E mâ da vuia-caret en desolation.

Deus ar mintin pa savis, me scrifas ul lizer  
 Da gaç d'am vuia-caret dre dorn ur messenger,  
 Da glêvet e santimant evit ar vech diveza,



Guell eo mervel buan eguet chom da languissa.

Pa erruas ar messenger ebars ty va mestres,  
E voe diguemeret mat evit e ziveza guech,  
Qemer eure al lizer hac antren en e c'hamb  
Da scrifa din va c'honje neuze souden vantant.

Ho setañ a c'houlennit, emei, va servicher,  
Assuret oc'h d'e havet, ia, en bêr amzer;  
Ma visac'h d'am santimant, mad ec'h illit credi  
Na voa nemet ar maro capabl d'hon separi.

Mes na breman na goude, emei, se zo certen,  
An amzer din d'ho caret ne aruo bigen,  
Amzer d'ec'h d'am c'haout ne aruo bigen;  
Pa em boa bolontez, e voa d'ec'h va goulen.

Me zo ur minor yaouanc e poursui va studi,  
Hac am bezo er bloa-mañ calz a velanconi,  
Hac am bezo er bloa m-â eur galon glac'haret  
Estonet bras o velet na en em garrimp get.

Pa deui an nevez-amzer, ar bleun bars erspern  
guen,  
Evo calon an dud yaouanq yiê ebars pep tachen,  
Ar fleurjou er jardinou a vo tout rejouisset  
Ha calon an dud yaouanc e pêvar c'horn ar bed.

Mes me savo un dourel var lein ar mene,  
Vis-a-vis da dy va mestres ha d'am hini ive,  
Da vouela gant glac'har d'am amzer tremenet,  
Da ober reflexion em planeden galet.

Pa voan-me deut ac'hane ur pennad eus e zy,

Ha me clêvet al lapouset er bot o fredoni ;  
 Ha me o chom d'o zelaou hac ive complesant,  
 Rac ar chanson a ganent a voa sur ravisant.

Cana a rent qer charmant, cana a rent qer yiê,  
 Rejouissa a rent calon tout qement o c'hlêve,  
 Ma commançont lavaret dime ive dre o moes :  
 Petra dal dide, cloarec, qemer tristedigues ?

Petra ra did en em nec'hi er bed-mâ gant da  
 chanç,  
 Danve madou zo certen ebars en abondanç,  
 Te so ebars er guêr gant da vam ha da dad,  
 Ne-c'heus nep necessite a voued nac a zillad.

Ha me a zo e cana ha yiê va c'halon,  
 Ha ne meus er bed-mân nep provision,  
 Finissa res hep retard, neuze en un instant  
 Ha rentet joaus bras calon un den yaouanc.

Guechal me'm boa un amzer a zesolation ;  
 Mes brêmâ me zo joaus, triumfant va c'halon,  
 Me a voar e gana brêmâ certen, va mignonet,  
 Evel an ene a ve barnet da vont d'ar joaustet.

Var ben un nebeut goude int bet en em gavet  
 En ur plaç a goste o daou, elec'h m'e doa lavaret,  
 Da rent a an eil d'eguile ar pez a voa dleet,  
 Ha da derri ar bromesse a voa etreze grêt.

Debonjour d'ec'h, va mestres, emezàn, pron-  
 tamant,  
 Petra a zo a nevez en ho comportamant ?

Diveza ma ho cuelis e voa brillant ho sellou,  
Ha bremâ n'o remercân nemet o scuill daëlou.

Hac hi ho respont din, ia, en ur guir bêr:  
C'huiso qiriec d'am glac'har, emei, va servicher:  
Retornet c'hoas ur vech d'am c'haout, me so  
contant

Da resina va buez evit cavet va c'hoant.

C'houi, certen, plac'h yaouanc, c'houi certen  
a so bet

Ar guenta gouarneres imprimet em speret;  
Mes daelou va daoulagad o vouela nos ha de,  
O deus va obliget da chench a volonte.

FIN.



GUERZ.

*Var un ton meurbed trist.*

**T**OSTAIT, calonou sansibl, selaouit gant silanç  
Ar recit eus va glac'har, trista experianç!  
Ar Fortun en e c'holer, deut eus an eurustet,  
Ha dre mouvamant e rod e deveus va stringet.

Ah! tao eta, calon baour! izella da glemmou;  
Ro liberte d'am speret da zespeign e boanniou,



C'houi ivez, va daoulagad, so en em disec'het:  
Va guinou n'ell mui comz, re oc'h eus-i trempet.

Bremâ leun a chagrin, ha va c'horf ha va ene  
Abandonet a grenn d'ar brassa calamite;  
C'houi va oll facultéou ha moderation,  
Evit ma ellin guell prononç va affliction.

O amzer a blijadur, te so ta tremenet!  
Consolation, esperanç, evidomp so collet!  
Allas! o sonjal rentout parfetoc'h ar boneur,  
Hor bez bet troublet hor chanç, fabriquet hor  
maleur.

F I N.

